

# CHANSON NEVEZ

VAR SUJET

## EUR PROMEZE FERVANT HAC EUR SEPARATION ETRE DAOU DEN YAOUANC

Var ton ar *Fauz Promese*

Prosternet e ma c'halon  
N'ho presans, Bretonnet,  
Vit goulen o c'hattantion  
Eur momet en secret ;  
Me disclerio en guirion  
Eur promeze fervant  
Hac eur separation  
Entre daou den yaouanc.

Na fel quet din er poent-man,  
Dont d'abusin paper ;  
Sujet avoalc'h a gavan  
Hep asten ar matier  
Eur re bennag martese  
A gemero an er  
Da meprisan ma bue  
Dre ma c'hesplikin scler,

N'on quet dign a drouc-zello  
Pa n'am anaveet ket,  
Rac zavantoc'h evidon  
A so bet n'em leuzet  
Ebars en lasc Venus  
Hac e mab Cupidon  
Pere a rent malheureuz,  
Sivoas ! meur a galon.

Me a so eun dea yaouanc  
Ag a meus consanet  
Carout eur plac'h yaouanc  
Dign da vean caret  
Vit dirag ma daou ligad  
Na meus remerquet hini  
Da gad eun er ken agreabl  
Herve ma fantasi.

Vel gand Doue inspiret,  
Da ouel an Assomption,  
Me a so bet az et  
N'he c'hichen en eur pardon  
En parez Plethantion  
Kichen eur goallis  
Eur plas devot a santel  
Goude fin an ofis.

Eno var douar ar Verc'hes,  
Me meus bet remerquet  
He skiant ac e furnes  
Ha memes e genet,  
Me meus gret reflexion  
A n'em sonjet erfat  
Na momp biquen separation  
Vit mar be ze d'he grat.

Abofter ma yaouankis  
A neus ma arretet  
Bet a voan vit n'en divis  
Ha pa meus quet credet  
Parlanti del enep fesson  
Demeus ar garante  
A zanten bars em c'halon  
N'he c'hever en dese.

Nao mis em bet en guirion  
Hep en em rencontri  
Delc'het ho c'hatansion  
Yaouankis me o supli  
Aman a teu Cupidon  
Gant eun ardeur neves  
Da allumi n'em c'halon  
Etemancho a garante.

Annols a re ar prae u-se,  
O vont d'eun assemble  
Penos am boa bolante  
Da gat e c'hamitie  
Hac evit n'en assuri  
Deus e fidelite  
A meus goudet diganti  
Ober din promesse.

AR PLAC'H

« Ma mignon nimp so yaouanc  
D'ober promesseou ;  
Gant an disseran tourmant  
A chanch hom ideou  
Ma torfemp hon promesse  
Hac ober eur parjur  
Me fell din en em bue  
Kavet eur guir assur.

AR POTR

« Birviquen an amser fall  
Na allo disrujan  
Ar garante real  
Pehini a c'ugan ;  
Mes me so en disfians  
Demeus ho carante :  
Roet din ann assurans  
Vit a rest hon bue. »

AR PLAC'H

« Arsa eta, na mignon,  
Pa omg en plas hirie  
Na vo quet dre draison  
A rin d'ober promesse

Kemer a refomp vit test  
Eun avocat a Dreguer  
Rac on c'halon so c'hoas fresk  
Da chom hep culateur.

He dorn en hem hini,  
Prosternet d'an daoulin  
Dirag Sant Ervoan Etouri,  
Mab henan Kervarzin,  
En illis ar Minihi,  
An gaoutec a vis mae  
A prometjomp dimesi  
Hon daou ann eil d'eguile.

Secret ve ar promesse  
Dirag eur pobl a leiz :  
Pere a rent malheureuz,  
Sivoas ! meur a galon.  
Da veit penn hom avocat  
Dre guir devotion  
A douger var eur brancar  
Bars er procession.

O solennite joaüs  
Evit eur pobl a te ;  
Biscoas de quen evurus  
N'em boa cat em bue,  
Zantout a ran ma c'halon  
Vel benet mesq ar joa ;  
Mes ret e cat separation  
Rac an nos a dosta.

AR POTR

« Arsa plac'h yaouanc fidel,  
Poent eo dispartian  
An heol so arri izel :  
Lequet din breman  
Eun termen d'a n'em gavet  
Herve ho polante,  
Rac pel a omp separet  
An eil deus eguile. »

AR PLAC'H

« De eisvet ar Zacamant  
Bars en kaer Landreguer,  
Zo eun assemble charmant  
Gant ar bobl ar c'hartier  
Mar be se d'ho polante,  
Hon daou n'imp ario  
En Landreguer, en de se  
Goude ar gouspero. »

## AR POTR

« Var kement-se merc'h iaouanc  
Me souet dec'h bonsoar,  
Gant cals a agreamant  
Me a dalc'ho memoar,  
D'an termen a eus fieset,  
Kredet m'e en em gavo ;  
Na vefomp biken separet,  
Vit ar rest on deyo. »

Pa ariis bars er guer,  
A meus bet ispliquet  
Deun tad a deur vamm tener  
Ar promesse ma gret,  
O daou a sculjont daero  
O c'haneveout ma chanç,  
Mes n'os eo pel a so  
Reposomp en silanç

Kerkent e yanas cousquet  
Vel eour ravisamant,  
Hac e meus bet remerquet  
Eur groas ker a arc'hant  
Ha varni eur gurunen  
Orhel gant greun perles,  
Poset en greis eur bleuen  
En kichen ma mestres.

Dre spont on bet difunet  
Mes goelet meus bet  
Dirag ma daoulagad ;  
Bet on pell e vemorin  
Var sujet kement se  
Mes rabet eo 'n droublin  
Vit actou eun unvre.

Tostad a ra d'an termen  
Pini mam assinet ;  
Mes goelet a ran eun den  
O tonet d'am c'havet :  
Roet neus din eul liser  
A so bordet en du  
Petra a so var a paper  
Ret eo huelet dustu.

## Al lizer

« Salut deoc'h ma guir vignon  
« C'hoas eur vech dre speret ;  
« N'in quet d'an assinasion  
« A moa dec'h prometet.  
« Scoet on gant eur c'hlevet,  
« Me gret vit ar maro,  
« Nomp ket gant Doue choaset  
« Vit bean priejo.

« Ma be a deui da gleuzan  
« Var ben neubeut amser,  
« Vit ar veach divezan  
« Adieu ma servijer,

« Gras dimp da gaut chans,  
« D'an n'em velet er gloar  
« Evit hon reconpans. »

## AR POTR out-hin he-unan

« O bleuen quen florissant  
Ma koue es d'andouar,  
Tout ma oll agramant  
A chancho en gac'har ;  
Oll esperans madefo  
Plijadur ma bue,  
Assembles guent a goueo  
Da repos bars da ve.

Rabet eo disconsoli  
Vit guelet al liser  
An termen a so irri ;  
Var c'hoas en Landreguer,  
Me a glevo a beurs mad  
Ha guir eo kement man :  
Ar paper a lest lakat  
Sort ar guerer yannan. »

Arri bars en Landreguer  
D'an termen assinet  
Vel ma sonnas peder heur  
Me meus bet intentet  
Lur plac'he yaouanc tremen,  
Laret d'he c'hamarades :  
Zo maro he vestres. »

Poignardet eo ma c'halon  
Ken a frim ma goad  
Vit clevet he declarasion  
En em c'hanavis d'he c'had ;  
« Respond din merc'h yaouanc  
Ma be ho madeles,  
Me a c'houl humblamant  
Penos a ra ma mestres. »

## AR PLAC'H YAOUANC

« Na servij quet den yaouanc,  
Rei dec'h anoudegues :  
C'hui a so bet eun tirant  
En andret ho mestres :  
Hi divoar goele ar maro  
A lekeas e foan  
Da scrivan dec'h ar c'helo  
Mes c'heus quet groet a van.

Me a moa e c'hasistet  
Da scrivan al liser  
Goude ma franchisset  
Ha roet d'ar facteur,  
He finissas he bue  
D'ar goener d'abarde  
Ha herie deus ar  
E diskennet 'n he

## AR POTR

« Me moa cals a esperans  
A voa fauz al liser,  
Pe groet gant tud ar mezsans  
Vit tremen ho amser,  
Mes n'os ken pikant  
A boes var n'os ken pikant  
Me a lar dec'h merc'h  
Kenavo c'henta goelet. »

Kouitat a ris an assemble  
Occupet ma speret ;  
Rac me en em vel hirie  
Malheureus var a bed,  
Ma mestres a so maro  
Ha me a chom breman  
Da dipitan ma deio  
Var he lerc'h er bed-man.

N'anvean quet ar matier  
A galmfe ma glac'har  
Ne na mo ken mes malheur  
Biken var an douar  
Pa velan peguen yaouanc  
A c'he deut ar maro  
D'am plomji bars en tourmant ;  
Deus a greis ma joaio.

Servig quet din chom aman  
Rac na allan quet canan  
Ha goelas var eun dro :  
Supplian a ran Doue  
Maro vap ar c'halver  
Ma recevo he c'hine  
Ha nimp holl en he gloar

Groet gant Pierre RAISON.  
Goude bean recevet an decla-  
[ration]  
Digant eun den yaouanc desolet  
Gant glac'har de vuqan caret.

(Propriété de l'éditeur)